

# Kimiat eur C'honscrit

*Var eun ton nevez*

Va c'halon a zo frailliet dre nerz va ankenio :  
E daoulagad entanet ken a zaero  
Allas ! deut eo devez ma renquan dilezel  
Lec'h kaer va bugaleac'h ma bro dous Breiz-Izel,

Adieu did va si balan war ar leinig ar grec'hen,  
Tachennik c'hals war pini buguel e c'hoarienn,  
Gwez ivin ker bokenneg en dizoel deuz pe-re  
E pad tomder an envou, e kousken da greis te

Adieu ma mam a ma zad, breman n'esperit mui  
E chomfe ho mab caret vit harpa ho kosni !  
Vit pourvei d'ec'h bara vel ma deuz gret dezan ;  
A lezen zo didruez, ho kuitat a renkan,

Nag a vech ma man dener, e renkenfet gwela  
Ha zeui var c'hran keniet ouz oc'h d'am em frotta.  
Ha welfet bars en oal ed va skabellik gollo.  
Har c'henvid o zeui deus fenubes dero.

Adieu, bered a barro, douar biniguet.  
A c'holo va zadou coz gant doue bet galvet :  
Da wel an anaoun klemmuz, n'in mui war o pezio,  
Da scuilla an dour santel mesket gant va daero.

Adieu, ma muia-karet, va douzik koant Mari ;  
Eur blanneden diremet a zen d'ho glac'hari ;  
Ho eureusdet ho joao skendus zo tremenet,  
Vel ar goumoulen, skanvik gant un avel kaset

Na welin ken da lagat ken lemm a ked leven  
O virvi a plijadur, du-ze pa erruen,  
Da zornik wen distak o kas a c'har en dro  
Da vouez ken dous na glevin o kana va gwersio.

Pa oamp er c'hastekismou, hon daou c'hoas bugale  
Hon c'halonno tenerik dija en em gleva.

Dirag Gwerc'hes a c'hroas-heut nag a wech a touejomb  
Na erruje birviquen disparti entrezomp.

laouanq ha dirzonsius allas ! ne wiemp ket,  
Pegement a ankresio er vue zo mesket,  
Ewitomp ne oa neuze lezenno na roue,  
N'anveemp merd eur lezen, hini ar garante.

Adieu, va nez amezec, Iannic, va gwir mignon,  
Kamaraded va c'hoario breur dre ar galon ;  
Piou ziousaz ! a guemero eur lod deus ma foannio ;  
Pion, breman, pa vin seder, gant-e me a c'hoarzo ?

Hep da vreur te iel breman e parosio neza,  
Da bizitat al leuriou, bars al lazo dorna,  
Hep aon, te iel da zisput maout ar c'hourennadek,  
Da zacha war e seiën, e bars ar varedek.

Adieu, va c'hi kez Mindu : va feal kamarad,  
N'effomp ken deus ar beurte da glask roudon ar c'had,  
Na glevimp mui er mene da chilpaden kiltrus,  
War var dorn mui ne zantin da deod karantezuz.

A benn eun neubeut amzer, kals a vignoned ien,  
Bars ar zoudard divroed, m'oar vad, de sonjant ken  
Mes da galon-te Mindu ; ne eo ket ken enkouez :  
Pell e ri c'hoas va c'havio dre da tezo klemmuz.

Adieu, va c'hazek velen, skan evel eun helex,  
Mistr evel eur logoden, koant evel eun oaez ;  
Ne d'zantin mui dindaonou, gant ann hast o tripal  
Ma daouarn, mui na stogfont o zelen var da dal.

Adieu holl plijadurio, foario, pardonno ger,  
Soubenno lez, noz-vecho, fest, leurrrio neve,  
Embado, ker birvidic, binlo stard ar skintin,  
Na drido ken va c'halon gant da zonnio lizzin.

Adieu kement a garan, adieu da virviken :  
Pell deus a Vreiz me varvo, mantret gant an anken  
Beals eus plante kisad da chom lec'h m'int krouet,  
A weler o tisec'ha raktal m'int divroet.

(Propriété)